

10782



FB
89L
682
ROV

MARO

Sant Tremeur

GANT

JEAN ROUDOT



— BREST —

Moullerez « ar C'hourrier », ru ar C'hastell, 4

1906

*D'am Eontr,
Persoun Sant-Tremeur, e Karaès.*

C'HOARIERIEN

TREMEUR, prins yaouank a c'hoad ar Rouaned.

KONOMOR, e dad, kont-meur Breiz.

GILDAS, abbad Rhuys.

GUENC'HLAN, drouiz-meur.

TALIEZIN, drouiz yaouank.

ARMEL, mignoun Tremeur.

FRIAL,

GOALBRAN, } drouized.

RUZ-VARZ, }

Menac'h, — eun tri pe bevar.

Drouized, — pemp pe c'huec'h.

Soudarded, — kement all pe ouспен.

E kreiz eur c'hoad : eur pezh derven, eun dolmen,
meñhir ; var an daolen, adren, eun draonien doun, mene-
ziou euz an daou du ; pell, pell, e fin an draonien, eun
tamik mor.



D'AL LENNER

Sant Tremeur a veve er c'huec'hved kantved; e vam a ioa santez Triphina, e dad ar c'hont Konomor, eun-den-bleiz a lazaz ne c'houezer pet euz e briejou gant ho bugaligoù!

Relijion griz an doueou koz a rene c'hoaz d'ar mare dre ar vro; ho beleien, hanvet Drouized, kaer ho doa stourm ouz prezegerien an Aviel, ar Bobl a droe gant ar re-man!

Ar giz a ioa gant an Drouized, pa ne iele ket an traou d'ho doare, da ginnik e sakrifis d'ho doueou goad an dud gant bep seurt lidou!

Setu perag er pez-c'hoari-man a veler Guenc'hlan, mestr an Drouized, o c'houlenn gant Konomor e briejou ag e vugale da laza en enor d'an doueou, evit terri ho c'hounar prest da skei var ar Bobl, dre ma tileze ar relijion goz!



Maro Sant Tremeur

PENNAD ARAOK KREGI DA VAD ⁽¹⁾

GUENC'HLAN, *Drouiz-meur*; TALIEZIN, *Drouiz iaouank*

(Ne veler da genta nemed Guenc'hlan var an theatr; bleo a baro hir a guen, ag o c'hoari gant e delen, harpet ouz an derven.)

GUENC'HLAN, o kana

Setu an heol o tiskenn a dreuz ar guez dero,
Droug-livet a glaz e zrem evel drem ar maro,
A ruz koummoul ar c'huz-heol 'vel ar goad tro var dro.
Euz ar c'hoummoul er mor doun setu kouezet an heol,
Ruillet 'vel eur pen anaoun 'kreiz an tarziou diroll,
Ken a skrij oc'h e velet ar bed oll gand horrol;
Setu an heol o tiskenn a dreuz ar guez dero,
Droug-livet a glaz e zrem evel drem ar maro!

TALIEZIN a gan, eb en em ziskuez c'hoaz,
mez o tostaat!

*Dre oll a drid ar meaziu,
Me glev an aic'houeder o kana,
Var nij dreist ar menezio,
Da c'hervel goulou deiz da bara;
Tridat a ra va goad a va spered,
Kan dudiuz a vout em c'halon.
Heol burzuduz, strink da sked,
Ma tarzo dudi an deiz varnhon!*

(1) Ar pennad-man a helfe beza lezet a gostez.

GUENC'HLAN

Setu an noz du dre oll oc'h asten e askel,
A dindanhi kousket sioul bugale Breiz-Izel,
Hag evit ho luskellat, mouez ar mór o sevel !
Setu, evit ho spounta, e kleuz ar c'hoz derven,
O sevel a dreuz an noz kri mantruz ar gaouen ;
C'hoant en deuz da lavaret ne zihunfont biken.
Setu an noz du dre oll oc'h asten e askel,
A dindanhi kousket sioul bugale Breiz-Izel !

TALIEZIN, oc'h en em ziskuez, drant o kana

*Du-hont, var gern ar menez,
Setu c'hui o skedi, heol laouen ;
Heol glan, deiz al levenez,
Disken e strad tenval an draonien !
Pobl, o lenva e kreiz noz ar maro,
Tavit, setu an heol o sevel ;
A dreuz da goajou dero,
An heol a bar varnoud, Breiz-Izel !*

GUENC'HLAN

Taliezin, va mab, na laouen eo da gan ;
Avi en deuz ouzid ar paourkez koz Guenc'hlan ;
Da gan a zo laouen 'vel kan an alc'houeder,
Pa gouez ken fresk var boul ar galon, ma kreder
E kuz, e peb noten, eur berad gliz mintin ;
Sevel ra d'an oabl glaz, ken skler ma gaffe d'in
A strink gant peb noten 'vel eur ban heol beure !

TALIEZIN

Va c'han a zo laouen, va c'halon zo ive ;
Eun huvre kaer deuet d'in a berz Doue, me gred,
Noz deiz, hun pe dihun, a zalc'h var va spered ;
Seblantout a ra din, dre va huvre, beza
Var eur menez huel : an heol prest da darza
Euz punz an noz a bign gant diri aour e skeul,
Hag eur mor a sklerder a bign, a bign d'e heul !
E kenver an heol-se, an hini a ioa kent
Var zouar Breiz-Izel o tisto! sklerijen

Na vezo mui nemed eur c'hlaouen peuz varo,
Outhi eur flammik sked a moged, bep eil dro :
O c'hortoz an heol-se da bara var an dud,
Henvel euz an eostik a gán var skour e c'hlud,
Tre ma tosta an deiz euz bordik ar menez,
Va c'halon-me a drid, a gán gant levenez !

GUENC'HLAN

Evel d'id-de, noz deiz, me a meuz eun huvre ;
N'eo ket, siouaz ! sklerder a dudi ar beure
A zav d'e heul em c'halon-me d'am frealzi ;
Va huvre ' zav ganthan eur mor a veikoni,
Me, e kreiz ar mor-se, strinket a distrinket,
Gant an tarziou bep eil lounket a dislounket,
Va spered, kas digas, euz eun eil spount d'eben
E kreiz ar c'hudurun hag an denvallijen !
An heol santel, evel pa vije saouzanet,
Ne hell mui kaout e hent da bara var ar bed ;
Var ar zao-heol e chom an nor-dál sarret kloz ;
Goudé an noz ne zeuz da c'hedal nemed noz ;
Gant ar spount hag an naoun, 'kreiz an noziou du-dall,
An dud evel bleizi en em zreb, 'n eur iudal !

TALIEZIN

A petra, a gav d'id, a fell d'an doueou
Rei deomp da anaoud dre ar seurt huvreou ?
Hervez ma meuz desket, mestr, en da gentili,
Pa fell d'an doueou rei d'an dud eun ali
E tigassont dezho huvreou burzuduz.

GUENC'HLAN

Evidoun-me, 'meuz aoun 've d'arvoudou spountuz
Prest da skei var ar bed ; erru eo, me a gred,
An amzeriou skrijuz merket gant an Drouized,
D'eur freuz a dle beza, — n'eo ket etrezomp-ni,
Krouadurien 'netra, savet euz eun tam pri, —
Mez etre an doueou a zo a-uz d'or pen
E bro ar sklerijen o veva hag o ren !

TALIEZIN

Daoust d'ar boan a ra d'in ar goumoulen tenval
A bign euz da spered, da zisliva da dal,
Me ne hellan miret va c'halon da dridal ;
Va c'halon 'zo ennhan 'vel pa vez o c'hedal
N'ouzon pe seurt dudi, evel pa vez e kuz
Dourn eun doue, ennhan eur c'halir burzuduz,
O kinnig d'am ene eun evach a c'houez vad !

GUENC'HLAN, o silaou eur c'han o tont euz a bell

Tav ! Me glev an Drouized o pignat gant ar c'hoad !
Silaou euz an draonien ho moueziou krenv henvel
Euz trouz ar mor pa vez ar pardaes o sevel,
Pa voud, e skoultr ar guez, mouez an ezennou noz,
Pa lenv, dre ar meaziou, eneou hon tadou koz !
An oll Drouized, a meuz galvet euz a beptu,
Dirag an dolmen sakr bremaik a vo erru ;
Euz al leac'h santel-man, pa bigno hor peden,
D'hor sperejou tenval a deuo sklerijen ;
Pebhini a hello, va mab, neuze gouzout
Petra 'fell d'an doueou rei deomp da-anaout !

*(Chom a reont da selaou an Drouized, a dosta 'n eur gana,
var don Bossen Elliant.)*

*Kaera derven a zisheole
Bro Vreiz, euz eur mior d'egile,
A voa var lein ar Yun-Elle !*

*Diskaret gant eun taol kurun,
E ma var zouar ien ar yun,
E c'halon goz e mil bruzun !*

*Derven, an tarz en da skoaz,
A-uz d'hor pen, a lugern c'hoaz
E vroud tan 'vel eur c'hleze noaz !*

*Ouspen gourdrourz ar c'hurunou,
Pe kroz ar mor dreist d'an aochou,
A glever hed an traoniennou !*

*Klemvan an eneou maro
Gant ar gaouen a nij an dro,
Da greizen gleuz ar guez dero !*

*Moueziou a zav euz an douar,
Moueziou a gouez eu an ear
O komz gant an traou dilavar !*

*Mouez, m'ho pije bet, o traou mud,
Na pebeuz spoutussa burzud
O pije diskleriet d'an dud.*

(Dre ma kanont, a zigouez an Drouized).



ARVEST KENTA

Er c'henta arvest, Guenc'hlan, an Drouiz-meur, hen deuz dastumet Drouized ar vro oll evit en em glevout gantho da laza Tremeur, hervez an doare merket gant an doueou !

N'eo ket aualc'h d'ar re-man kaout goad Tremeur ; ar goad-se ne dalvo netra ma n'eo ket skuillet gant dourn e dad, a gant assant an oll Drouized guitibunan ; ma vez great ar zakrifi en doare-ze, neuze relijion an doueou koz a vezo saveteet er vro !

Mez setu Taliezin, drouiz iaouank, o sevel e vouez : ne assanto biken da eul lid ken kriz ; trei a ra zoken kein d'an Drouized, ag eun neubeud Drouized all d'e heul, evit mont da glask Tremeur a d'e zifen ouz ar maro.

Guenc'hlan a zo mantret ; telen santel an Drouized koz a dor etre e zaouarn ; a kementse a zo eur zin fall ; toui a ra ar belek koz a deui evelato a-ben euz e vennoziou ! Tremeur a vezo lazet, kousto pe gousto, ag an doueou koz a vezo mistri !

GUENC'HLAN, TALIEZIN, AN DROUZIED

(Guenc'hlan er c'hreiz, ar re all, renket en daou du)

GUENC'HLAN

Pelec'h 'ma an tri Drouiz em oa kasset ho zri,
Dre henchou Breiz-Izel, gant bep a gefridi ?
Te, da genta, Frial, m'oa kasset da c'hervel,
Evit sikour da vro, Drouized Breiz da zevel :
Lavar pe seurt respont t'euz bet gant da vreudeur,
A pe seurt digemer da gannad an Drouiz-meur ?

FRIAL

Euz a vro Vreiz, Guenc'hlan, echu gan-en an dro ;
Furchet a difurchet 'm euz kement korn distro,

Euz a enezen Sün betek meinhir Karnak,
 'Lec'h ma kreden vije kuzet eun Drouiz bennak !
 Rec'hel ar mor varnho an tarziou o tibun,
 Re ar menez faoutet ho fen gant ar gurun,
 Bep eil o deuz klevet va mouez krenv o c'hervel,
 Da harpa ar Vam-Vro, Drouized Breiz da zevl !
 Peurliessa n'euz bet, evit respont d'am mouez,
 Nemed trouz an avel pe kri al loened gouez !
 Pet derven sakr, guechal o voda didan'hi
 Drouized, stankoc'h eged ar skouriou ioa varnhi,
 N'euz dioutho chomet nag eun Drouiz nag-eur skour !
 Peoc'h ar maro e leac'h ma kanè teodou flour,
 Eskern lezet gant ar bleizi var ho dilec'h :
 Setu ar pezh am euz kavet e meur a lec'h,
 A-uz d'ho, e sribil euz eur skour huel-var,
 E kichen ar falz aour, an delen dilavar !...
 O Guenc'hlan, o Drouiz-Meur, disterik eo ar rum
 Euz an Drouized e meuz, dre Vreiz, gellet dastum
 Da zont aman, hirio : e mañt ell en dro d'id !

GUENC'HLAN

N'euz forz ! Euz an doueou eo a teu ar gounid,
 A n'eo ket euz niver pe euz galloud an dud ;
 Ne vo nemed kaëroc'h a skleroc'h ar burzud
 Pa vezimp deuet a benn, ni strolladik netra,
 Da lakat, gant hon dourn, pen ar bobl da blega,
 Hag en despet d'ezhan da soubla eur wech c'hoaz,
 Var e zaoulin, diragdoueou an Dero braz !...

— Klevit eta breman perag, Drouized santel,
 A meuz, 'vit dont aman, ho kalvet euz a bell !
 Rag spered eun doue 'zo o c'houeza varn'houn,
 A d'e heul va spered a nij 'dre an oabl doun,
 'Lec'h ma skriv biz Doue, var levriou ar stered,
 Al lezennou santel 'zo o c'houarn ar hed !

(Ag e pign var an dotmen.)

Me a vel eur Groaz pren, tric'hant vloaz-sopeuz vreñ ;
 Me 'vel eun derven-vras, iac'h a krenv 'vel ar mein,

Goude mil a mil bloaz e c'haloun en e c'hreiz ;
 Euz a skeud an derven a dec'h oll Boblou Breiz,
 Touellet gant komzou beleien pennoù moal,
 D'en em rei, 'hars ar Groaz, da Zoue eur Vro all !...
 O skrijussa torfed euz an oll dorfejou :
 Gant Boblou Breiz-Izel, nac'h et ho doueou !...
 Skrijus a vo ive ar dle 'rank an douar
 Da baea 'vit terri nerz spountuz ho c'hounnar !

RU-VARZ

Oh ! lavar d'eomp eta, rag mal eo ganeomp kleout,
 Pe seurt digol 'zo red d'an doueou da gaout ;
 Na pa ve red hor goad deomp-ni, oll Drouized Breiz,
 Na pa ve zoken ar galon zo 'n hon c'hreiz :
 Hor goad hag hor c'halon ni a roffe, laouen,
 'Vit prena, o doueou, silvidigez ar c'houden !

GUENC'HLAN

Eul liam sakr a zo, hag hen henvel aoualc'h
 Euz al liammou krenv a burzuduz a zalc'h
 A doueou a tud skoulmet striz etrezho ;
 Al liam santel-se eo an hini a zo
 O skoulma etrezho a tad a krouadur,
 A ne heller ket skei an den en e natur
 Euz eur boan skrijussoc'h, euz eun dounoc'h goui,
 Eged ober dezhan diframma a terri
 Al liammou beo-se, liammou great gant goad,
 A zo skoulmet etre ar bugel hag e dad.
 Al liam-se, sanket e c'hriou beo ken doun,
 Eo a renk hor gountel skei evit kaout ar pardoun !
 Ia, dre vuntr e vogel c'huoc'h guech merzeriet,
 Kalon eun tad ez beo 'dle beza kinniget !
 Eun tad var an dolmen, an eil var egile
 A dle skei a laza c'huoc'h euz e vugale !

TALIEZIN

Va goad euz da glevet a zo stravouillet oll,
 A skrija ra va mel ennhon gant an horrol !
 Pelec'h a vo kavet eun tad ken dinatur ?

GUENC'HLAN o tisken euz an dolmen

Konomor n'euz dija lazet pemp krouadur !
Evit peur-achui e labour, ar C'hont-meur
A dle skuilla fennoz goad ar c'huëc'hvet : Tremeur !
...Goalbran, pa vezo poent, a prest a vo ar C'hont ?

GOALBRAN

'Ma o c'hortoz an heur, var ribl al len, du-hont !
D'an douar, d'an avel e skouarn hag e fri,
Eiz dervez zo e ma dre ar c'hoad 'vel eur c'hi !
Avechou var ar guez an huella e pign,
A pa ne vel netra o tont, e zent a skrign,
Heja ra e armou gant kriadennoù gouez,
Gant arrach a zispen ar rusken euz ar guez.
Avechou, er c'hontrol, e zourn var e visach,
Astennet d'an douar na ne fich na ne flach,
Evel eur c'hrouadur a zirol da grena,
Da ziframma e vleio euz e benn 'n eur leva,
O komz, oc'h irvoudi en e bart e-hunan :
« Goad adarre, 'mezan, da c'hoad, mab a garan ! »
Neuzè, pa ne vije soudardet var e dro,
D'ar gear en despet d'in e tec'hfe prim en dro !

GUENC'HLAN

Ke, a gra d'ar C'hont-meur gedal c'hoaz eur pennad !
Mez, a deut eo ive ar mab goude an tad ?

RU-VARZ

Ganez, Guenc'hlan, eo bet roet d'in urz da glask,
A da stlenja, evel eun oan var bouez e nask,
Mab yaouank Konomor da zic'hoada aman.
Amzer a poan m'euz bet 'vit kaout krog ennhan ;
Rag Gildas, o c'houzout oa klasket gant ar C'hont,
E guze dre ar vro, guech aman, guech du-hont,
Eb rei d'ar c'hrouadur, na da zen all ebed,
Da anaout ar gerent a bere oa ganet.
Goude meur a dro vean, eur pardaez ec'h erruiz,
Da c'houlèn va lojeiz e toul-dor menac'h Rhuyz !

Enho eo e veliz hag ec'h anaveziz
Ar paotr euz drem e vam, euz ment nerzus e dad.
Euz a venac'hti Rhuyz, Gildas a ioa abbad.
Goulen a riz ganthan beza manac'h ive ;
Kement a riz zoken ma teuz dizale
Da veza e vignoun, a mestr-skol gant Tremeur ;
Evelse m'euz gellet ho kelen var an heur,
Pa zivizas Gildas kaz euz a ribl ar mor
Da bourmen dre aman mab ar c'hont Konomor.
Gildas en deuz lezet ac'hanon pen da ben
Da renka ar beach euz va c'hoant, a va fen,
Da zibab an henchou, da verka e pe boent
Kemeret al lojeiz hag ar pred hed an hent.
Eaz eo bet d'in eta, hag el lec'h hag en deiz,
Hervez da c'hoant, teuler an oan e skilf ar bleiz.

GUENC'HLAN

Mad eo d'an oan pa lip gliz ar flourennoù glaz,
Mad eo d'ar bleiz pa lonk goad an oan a lazaz ;
A mad did ive, Drouiz, pa hell da gountel noaz
Lakat var an douar da redeg, 'vel eur vòaz,
Ar goad a c'houlènne an doueoù santel.
C'houez ar goad-se 'zo d'in dous evel blaz ar mel !

TALIEZIN

Evelato, Drouized, 'ben kondaoni eun tad
Da laza eur bugel ganet divar e c'hoad,
Eo red 'pije kavet eur c'houden a dud hudur,
Eur c'houden a dud sarplant, eo d'an oll plijadur
Ho guelet gant ho broud a gant bilim-ho dent,
En em zrailla an eil egile var an hent !

RU-VARZ

Klevet t'euz eo Tremeur euz an huella gouen,
Euz ar c'hossa a hell biskoaz genel eun den :
Muioc'h a Rouaned 'zo euz e dadou koz
Eged a stereden o lugerni en noz ;
Gouen Rouaned int bet dre an oll gantvechou,
A n'euz gouen dud ebed ken tost d'an doueoù !

TALIEZIN

Mez ganeoc'h da vérvél, pa eo barnet hirio,
Pa ma var ar vlerim kountel griz ar bourreo :
Tremeur, en e c'hoazied, n'hen deuz dalc'het taken
Euz ar goad a verve e kaloun tud e c'houden ?

RU-VARZ

Ar guel euz a Dremeur ebken a zo aoualc'h
'Vit gouzout pegen krenv a divlam a gendalc'h,
Dre e c'hoazied flour, goad ar Rouaned koz ;
E ben soun 'zo varnhan 'vel pa vez o c'hortoz,
Var e vleó flour, 'giz lin, kelc'h aour ar gurunen ;
Anezan e hunan, pa gomz, a stou va fen !
A daoust ma ne ziver 'med mel euz e vuzel,
Skler eo evelato da gompren, er brezel,
Pegen ter a drousfe ma ziroffe, eun deiz,
Nerz an tan a zanter o c'horí en e greiz.

TALIEZIN

A setu goulskoude an den a vo bremaik
Skullet aze e c'hoad a dispennet e gik !
Ar goad a ziskennaz euz goazied Arzur,
Ar goad a vag an dourn gouest da zerc'hel ar stur,
Da sturia bagik Breiz 'dreuz tarzious a rec'hel,
'Dreuz spount ar c'hurunou a kounar an avel !

GUENC'HLAN

Ma ve puroc'h ar goad c'hoaz en e izili,
Krenvoc'h 'vit mel dero, glannoc'h 'vit bleun lili,
Ne ve evidoun-me nemed guelloc'h a ze
Da ruzia an dolmen santel a zo aze.
Rag ar c'houez anezhan, dre an oabl o sevel,
Ne vo nemed c'honekoc'h a ze evit gervel
Doueou ar Geltied da zistrei en hon touez,
Da rent a d'hor bro goz a d'hor gouen ar vuez !
Var douar hon tadou, perag ne glevomp-ni
Nemed peoc'h ar maro pe mouez ar velkoni ?

Luduet ar c'heariou, lazet ho foblou tud,
Var ar meaziou o ren an anevaled mud,
Ar Vretoned divoad a dinerz da zerc'hel
Lostennou an alar pe kleze ar brezel ?
Perag-ta, ma n'eo ket abalamour ma 'z eo
Tec'het an doueou a zalc'he, iac'h a beo,
E kreiz ar Vretoned ar goad koz da virvi ?
Hag aoualc'h eo, 'gav d'id, goad oaned pe tirvi
Da baea an eurvad da velet, var ar vro,
'Vit iac'hat e gouliou, hon doueou distro ?

TALIEZIN

Eur vouez a zo ennhon o sevel hag a gri
Ne hell ket doueou kaout kaloun ken kri !
Eun doue 'zo doue evit rei ar vuez,
N'eo dreist an den nemed dre vrasoc'h madelez ;
A pa teu dourn an den er bed da lakat freuz
'Vit iac'hat ar gouli, piou a gredfe n'o peuz,
Doueou, ken remed nemed eur gouli all ?
Var zigarre eo eat gouen ar Geltied da fall,
Piou a gredfe a ve mennoz e doueou
Dont d'e iac'hat gant goad, lac'herez a muntrou ?

GUENC'HLAN

Piou en deuz troet d'id da spered, ma kredez
Sevel, a enep d'in, da vouez evel ma rez ?

TALIEZIN

Piou en deuz goassoc'h c'hoaz troet d'id da hini,
Ma kredez dirag tud, evel pa vent bleizi,
Displega eb ruzia mennoziou ken euzus ?

GUENC'HLAN

Ma selfez euz va bleo guen kan, arog respont,
A skournfe var da deod komzou ken divergont !

TALIEZIN

Drouiz, gant ar goad me 'vel hirio ruz da vleó guen,
Gant eur goad divlam prest da goueza var da ben !

GUENC'HLAN

Te gav d'id eo divlam, va mab, goad an hini
A zeu, dre draisoni, da c'houeza kassoni
E kaloun an doueou a enep tud e c'houen ?
Traitor eo 'nep a c'halv var e vro an estren ;
Hag hen n'eo ket mil guech goassoc'h traitour an nep
A lak kounnar Doue da zevel 'n e enep ?

TALIEZIN

Mar deo traitour, galvit Tremeur dirag ar varn ;
Ma tle mervel, lakit anezhan 'tre daouarn
Ar bourreo, ez eo kementse e vicher ;
Mez kondaoni e dad da veza e giger !
Ah ! kentoc'h ma vez skler eo Tremeur eun traitour,
Me c'houlenfe beza va-unan difennour
D'am doueou a d'am bro ! Me zaffe 'n ho hano
Enep Tremeur, da rei pe da gaout ar maro.
Var da zolmen, pa rank skuilla eur goad divlam,
Fors piou ouzomp hon daou en divije bet lam,
C'hui a raffe d'ezhan var ar mean didruez
Peurachui da rei e c'hoad hag e vuez !

GUENC'HLAN

Lez e peoc'h da glenze stag euz e c'houriz ler,
N'eo ket goad nag emgan ganez a c'houlenner !
An doueou aman ne c'houlennont ouzid
Nemed ma kemeri perz ganeomp oll el lid !
Evit mired ouz brec'h Konomor da grena,
Pa grogo er gountel, ni grogo da gana
A da gana ken ter, ma c'houezimp, gant hor c'han,
E kalon Konomor ar gounar hag an tan !
Peb Drouiz eo red dezhan skei Tremeur da vervel
Gant nerz e ioul, a nan gant bek lem e gountel !
Kaer en deffe mil goad redek ruz, a boullou,
Ganthan ma ne ve ket kemesket hon ioulou,
A chomfe dic'halloud ar goad da zinerza
Venjans an doueou, varnomp prest da goueza !
A ma chomfe eun drouiz ebken eb unani,
Evit ar muntr sakr-man, e ioul gant hon hini,

Aoualc'h ' ve kementse evit kas da nean
Al lid-man en deuz d'in koustet kement a boan.

TALIEZIN

Mad, neuze eo kouls d'id, arog ober an taol,
Chom eb prepar aman ar gountel hag an daol ;
Rag eun drouiz ' zo aman a ne garfe biskoaz,
'Viteur seurtmuntrerez, o Drouized, rei d'eoc'h skoaz !
Oh !... kredi a raffen emoc'h oc'h ober goab !
Petra ! N'eo ket aoualc'h a deuffe goad eur mab
Da zistanka bremaik dindan kountel e dad,
Da vera d'an douar dirag hon daoulagad ?
Neubeud eo chom eb saill' var eur seurt aneval !
Pa zispenn e vab, red a vo c'hoaz, gant mal,
Teuler er goad da neui hor c'halonou laouen !
N'eo ket aoualc'h eur muntr da zoueou hor gouen ?
Peb drouiz en e galon a dle renevezi
An torfed a dleffe ober dezho heugi !
O doueou digriz, ne fell deoc'h var ho tro
Kaout 'med beleien a vuntr hag a varo !

GUENC'HLAN

Evit da zoueou, marvet eta ar feiz,
'Moa gant ker braz soursi maget d'id en da greiz ?
Te, am oa dibabet etouez da oll vreudeur
'Vit dougen d'am c'houde kurunen an Drouiz-meur,
Te eo a deu hirio da c'hlavoura varnhi,
A d'e bressa dindan da dreid e kreiz ar pri ?
O, siouaz ! piou eta en deuz laeret varnhoun,
Va mab Taliezin ; tensor aour da galoun ?
Laeret eo da galon gant ar manac'h pen moal,
Pa n'e meuz ket outhan gouezet mad e ziousal !

TALIEZIN

Den ne helfe laerez kalon Taliezin :
Da rei da nep a gar va c'halon a zo d'in.
D'id a oa va c'halon, d'id a d'as doueou :
Te eo t'euz etrezomp trouc'het al liammou

Gant da gomzou, krissoc'h 'vit drem ar gountel dir !
 Ma tije kendalc'h'et, gant ar vad hag ar guir,
 Da vaga va c'halon, beteg heur da varo
 'Vijen chomet ganéz dindan skeud da zero !
 Mez pell-ze e santen o tont, euz da vuzel
 Var va spered, felc'h trenk kemesket gant ar mel !
 Pell 'zo en da gomzou a zante va spered
 'Vel koumoulennou noz o tont da heul ar sked !
 Hirio, n'ez oud mui d'in nemed eun heol mouget,
 Ne zistollez mui d'in nemed noz a moget !
 Pell ouzid a fell d'in, gant heuz, kemer an teac'h,
 Da glask an deiz nevez, du-hont, n'ouzon peleac'h !
 Evel ar c'haro skuiz a red d'an eienen,
 Var eün, eb netra 'med e sec'hed d'e ren,
 Me a ielo a dreuz an noz ken a gavin,
 Dirag va daoulagad, ar sklerijen vintin !

Diblas a ra da vont kuit.

GUENC'HLAN, *o stankà an hent gant e gleze.*

Hag a gav' did tec'hel ouzomp-ni evelhen ?
 Me a fell d'in, arog ma tec'hi ac'halen,
 A ve var an dolmen peur achuet al lid,
 Ne hellomp rei dezhan e oll c'halloud eb d'id !

TALIEZIN, *a den e glenze ive*

Al lid-se, eur vech c'hoaz, a chomo dic'halloud
 Mar d'eo red deoc'h, evit e lakat da dalvoud,
 Kaout va bolontez unanet gant ho re !
 Nan ! biken na droin va ioul da gementse,
 A renons d'e laza kouls a ve deoc'h eta,
 P'eo guir ne dalvo deoc'h e varo da netra !

GUENC'HLAN

Va faotr, n'ouzez ket c'hoaz petra eo an Drouiz koz !
 Kredi 'rez n'euz ouzin nemed moged a noz ?
 Me a ziskuezo d'id a zo luc'hed a tan
 Ennhon, aoualc'h evit d'az puluc'ha dindan !
 Drouized, krögomp ennhan d'e laza var an heur !
 Evelse ne chomo en hon touez, o breudeur,

Traitour ebed da zinerza al lid santel !
 Varnoud 'vo da genta esäet ar gountel !

EUN DROUIZ, *gant e gleze a zifen Taliezin*

Hola ! Ne gredit ket n'euz aman 'med eun drouiz
 Hag en deffe heuged 'rag eun torfed ken kriz.
 Me dro a da ganthan : biken ne c'houzanvin
 A ve dirazoun-me skoet Taliezin !

EUN DROUIZ ALL, *ar memez tra*

Ia, gant Taliezin ema ar virionez !
 Euzdaglevet, Guenc'hlan, me 'meuz bet spount a mez ;
 Etre hon diou galon me 'meuz santet ive
 O terri al liam guechal skoulmet ken kre !

EUN TREDE, *evel an daou all*

Gant hon dourn nag hon ioul, biken, skoaz ne rimp-ni
 Da zivoad a Tremeur aman, evel eur c'hi !
 A pa zeo ken digriz doueou an taoliou mein,
 D'ezho, gant Taliezin, ni hirio a dro kein !

GUENC'HLAN

Petra a glevan-me ? Perag oun-me bevet
 Keit all evit kleout ar pezh a meuz klevet ?
 Klevet moueziou drouized o sevel enep d'in,
 Enep d'in o sevel da vouez, Taliezin !
 An Drouized dirazhon rannet e diou rummad,
 Gant tan goal ar venjans a verv ho daoulagad,
 Ema ho c'hlezeier gantho 'tre ho daouarn !
 En dro d'in luc'haden an dir, trouz an houarn....

Eneou an Drouized koz, diouallerien ar vro,
 Diredit aman oll euz a beoc'h ar maro,
 Da zistana ho goad hag o c'halon direiz !

TALIEZIN

Paouez, te, da bedi eneou Drouized koz Breiz,
 Rag, ma komzfent hirio, e roffent ho malloz
 D'an nep en deuz mesket, gant ho c'henteliou koz,

Sorc'hennou ken mezus hag ar re 'teuz, bremaik,
Gant da c'henou trompluz kredet deomp-ni kinnik !

Drouized koz, a n'eo ket oc'h ene a zantan,
En heur-man, em c'halon o c'houeza tiz a tan ?
Ia, ho mouez a glevan, o tiskleria d'in skler
Ne zeu, euz muzellou Guenc'hlan, nemed geier.

Tec'hel a reomp breman ; mez pa vo deut an heur,
Ni 'vezo oll aman evit difen Tremeur,
Evit difen ive kreden ar virionez,
Evel eur mel trenket troet e gaou ganez.

TALIEZIN o kana, ter a krenv, var don Arzur, troet var
zu Gwenc'hlan.

TON AN DISKAN

*Etre da zaouarn ne gan ken,
Raoulet varnhi ar zeiz korden,
O Drouiz Guenc'hlan, an aour-delen.*

TON AR C'HOUPPLAD (o trei e gein da Venc'hlan n'eur
gana doussoc'h)

*Mez, var an avel a teu d'in,
Kan eun delen, ouz e c'herdin
Mouez skler an alc'houeder mintin.*

DISKAN (var-zu Guenc'hlan)

*Sec'het e skour hag e rusken,
Ar prenv, o krignat e grizien,
Da zerven goz vrall uz da ben.*

TON AR C'HOUPPLAD (o trei e gein)

*Guez nevez dre Vreiz en em skign,
Han-goan glaz evel guez ivin,
O vera outho mel a guin.*

DISKAN (var-zu Guenc'hlan)

*Arog mervel drek an dorgen,
Da heol a orjel hag a gren
Dre henchou an env o tremen*

AR C'HOUPPLAD (o trei e gein)

*Eun heol nevez en oabl a bign,
O tistol gor a nerz divin,
O goazed Breiz, leiz hor peultrin.*
(A kuit gant e vignouned)

GUENC'HLAN, mantret

An taol-man ioa pell-zo va spered o c'hedal ;
Kaer 'm euz bet ober va bouzar a va dall,
O kredi a rankan, kannaded a varo,
E kavan deiz a noz, a bep tu var va zro !
Ar goad a c'houlennac'h, doueou euz va spered,
Ne vezo ket skuillet en doare ma 'z eo red !
Na vo ket great al lid a dlle o tioual
Euz drem falc'h an Ankou, o traou amzer guehall !
O traou an amzer goz, o meinhir, o dero,
Drouized a doueou, varnomp 'bar ar maro !

Hag a gân, var don : Marzin, breman trizeg miz

*Me a glev o tont, euz a bell,
Eur c'hoabren zu 'giz eur sparfell,
Kurun a tan e diou askel.*

DISKAN

*Sell, telen aour, sell tal oc'h tal ouzin,
Biz an Ankou 'sko var da gerdin.*

*Eul luc'haden forc'hek dindan
A sribil evel eur skilf tan,
En e skeud eul labous a gân !*

*Dindan skilf tan ar sparfel du
Taolet eo d'an avel e blun,
Hag e gorfik-paour e ludu !*

O lavaret an diskan, e tor e delen gant trouz.

GOALBRAN, o kemer an delen euz dourn Guenc'hlan

Oh ! etre da zaouarn, torret an aour-delen ;
Diouthi en eun taol freuzet ar seiz korden ;

Ar c'herdin aour, steuet gant dourn an doueou,
O chom e pebhini anezho sperejou !

RUZ-VARZ, oc'h ober kement all

Seiz spered a veve e kerdin an delen,
Seiz doue o tional buez a gloar ar c'houen !
A setu hint freuget a diskoulmet ho zeiz !
Pelec'h oc'h-c'hui tec'het, o diouallerien Breiz,
Pelec'h oc'h-c'hui tec'het, sperejou melodius,
Pa zeo torret ganeomp al liammou nerzus
A ioa euz ho skoulma euz korfig an delen,
'Vel ma zeo ouz e gorf skoulmet ene an den ?...

FRIAL, oc'h ober kement all

Tavet an delen aour, a lakas an doueou
Ennhi ar virionez, mezur an eneou ;
Mouget an delen aour, a ioa e zeis korden,
Var spered ar Geltied, o strinka sklerijen !
Gwelloc'h a vije bet e vije eat an heol
E gouelegou tenval an envou d'en em goll.

GOALBRAN

Hi eo a ioa buez a nerz bobl Breiz-Izel.
P'eo marvet an delen, red 'vo d'ar bobl mervel !
Hag a vezo bemdez disteroc'h-distera
Gouen nerzus ar Geltied o tisken da netra !
Sked ebet euz ar vad o para var ho zal,
Sked ebet euz ar guir en ho sperejou dall,
Hent ebet, d'ho ene, digor dre an envou,
'Vit mont a den-askel da vro an eneou !
Goad ar c'houen a vagas sperejou ken huel,
Ne c'hano nemed tud, siouaz, muioc'h henvel
Euz an anevaled, 'ma o holl flijadur
O turial, dizeblant, e kreiz ar fank hudur ?

GUENC'HLAN

Ag an oll drougou-se a skofe var ar gouen
Dre faot goad eur paotrik da c'hlebia va dolmen ?

Kementse ne vo ket ! Goad Tremeur a skuillo !
A kentoc'h, gant va dourn va-unan, a ruillo,
Gant goad ar paotr Tremeur, goad c'hoaz kement hini
Ouz bolontez an Drouiz a glasko enebi !
Konomor 'zo aze, dre ar c'hoad gant e dud,
Hevel euz bleiz diboele a skrign, a red, a iud !
M'hen tou d'id, Konomor, o bleiz koz, n'ho peza aoun !
Goad a po d'az sec'hed, a kig a po d'az naoun !
A ma teu, daoust da ze, galloud va doueou
Da veza er vro-man kollet d'an eneou,
Da vihana, dolmen, a menhir, eur vech c'hoaz
A ziredo varnoc'h puill, druz a ruz, eur waz,
Eur waz a c'hoad kristen, aoualc'h evit derc'hel
Ar zonj euz an Drouized dreuz ar c'hantvechou pell.

Fin ar c'henta Arvest

EIL ARVEST

Er pennad kenta euz an eil arvest, mignoured Taliezin a zo prest da falgalouni; mez an Drouiz iaouank a ro dezho adarre nerz-kaloun da zifen Tremeur.

En eil pennad, a velomp Konomor o tont gant Guenc'hlan; spountet gant ar remors, ar C'hont a refus breman laza e vab Tremeur; plega a ra evelato da c'hourdrouzou Guen-c'hlan, ag a dou skei n'eo ket ebken Tremeur, mez Taliezin ive, ag e vignoued.

Setu ivez o tigouezout, goude ma eo eat ar reman kuit, Tremeur! Tenval eo e ben; rak klevet a ra eur vouez en e spered o lavaret dezhan a dle mervel evit prena, gant e c'hoad, eneo ar Vretoned da Jesus-Krist; kaër ho deuz Armel a Taliezin, ne hellont ket kas euz e spered ar c'hoant mervel!

Neuz nemed sant Gildas, gant e gomzou ag e oberou burzuduz, ag a helfe e savetei.

Taliezin a en em daol dre ar c'hoajou evit klask Gildas da zavetei Tremeur.

KENTA PENNAD

TALIEZIN, AG AN TRI PE BEVAR
DROUIZ YAOUANK

AR C'HENTA DROUIZ

Petra hon deuz-ni great, Bugale diskiant?
Savet hon deuz hor mouez enep an Drouiz, ar zant;
Gant hor spered dister, hon deuz kredet sevel
A enep an hini eo roet dezhan ar guel
Euz kement tra a zo kuzet e kreiz an noz,
Kouls euz an traou da zonthag euz traou guechal goz;
Gant hor pen skanv, sammet gant foug ar yaouankiz,
Var gomz ar belek bras hon deus taolet dispris!

Pe gentoc'h, d'ho komzou, o doueou santel,
Hon deuz kredet c'hoarzin, paotred yaouank diboel !
Setu breman varnomp ho malloz o koueza,
A var hor bro ouspen ho kounnar o poueza.

AN EIL DROUIZ YAOUANK

Evithan da veza eun dra griz d'ar spered,
Perag maro Tremeur ne ve ket eun dra red ?
Perag ne ve ket red, evit goalc'hi hor fank,
A skuilfe d'an douar goad flam ar prins yaouank ?
Perag, evit miret euz hor gouen da vervel,
Na deuffe ket ho mouez, o doueou, d'hon gervel
Da leda hor c'horfou var dolmen ar maro,
Da skuilla hon oll goad evit buez ar vro ?

AN TREDE

Ne ve ket guelloc'h deomp, paourkez Taliezin,
Dirag an tad Guenc'hlan n'em doler d'an daoulin,
Anzaou hon deuz komzet evel tud dientent,
A d'an oll drouized all rei dourn da ziagent
Evit peurachui al lid en do galloud
Da bellat euz hor pen ar spountussa darvoud ?

AR C'HENTA

Ia, skoulmomp adarre ar seiz korden brevet
Var an delen aour sakr, 'vit ma vo c'hoaz klevet,
A hed traoniennou Breiz, o c'houeza, gant e c'hân
E kalon ar Geltied, nerz didrec'h an emgan !
Ia ! ra varvo Tremeur, p'eo guir eo red e skei
'Vit lakat a biou deomp gurun Doue da drei.

TALIEZIN

Skei Tremeur da vervel ? ho !... rei dourn d'e laza !...
Dirag e varo kriz en em rei da gana !...
Guelet e dad digriz, gant ar memez kountel
M'hen deuz dija ganthi dic'hoadet pemp bugel,
E poul kalon e vab-sanka taol ar maro ?...
Nan !... Da gementse biken va c'halon na blego !

Nan ! Nan !... E ma enn'hon adarre o sevel
Ar vouez nerzuis am galv keit all-zo da dec'hel,
Da dec'hel pell euz skeud dero ténval an Drouiz,
Pell euz an dolmen c'hoad, euz e lidou digriz !
Me a dec'ho du-hont var guern ar menezioù,
'Vit santout digeri enn'houn, gant ar bleunioù,
Da sked an deiz santel, va c'halon dizec'hel !
Va c'halon, 'vel ar bleun, en deuz naoun a sec'hed,
Naoun d'ar bannou heol a zeu, da c'houlou deiz,
'Vel eur mel euz an env, da goueza en o c'hreiz !

Da sked var va ene, o guirionez santel !
Da vouez eo a glevan em c'hreiz ouz va gervel ! [vouez,
Mez komz d'in skleroc'h c'hoaz ! sav huelloc'h da
Pe mouget vo gant nerz ar griadennoù gouez
A zavo, meur a vech c'hoaz, en diabars d'in !...
Spered a gelennaz spered Taliezin,
Pa grediz n'em sevel a enep an Drouiz-meur,
Daoust a ne c'hellan c'hoaz da anaout, o va breur ?
En dro d'in a glevan evel trouz da askell
O voudal d'am skouarn 'vel eun ezen avel !
Komz-ta c'hoaz d'am spered, o kannad euz an env,
A tol da sklerijen da bara d'am ene...

Euz a c'houeled ar c'hoat, piou zo erru du-hont ?
Sell ! an drouiz-meur Guenc'hlan, harpet var skoaz ar
Aman, kredabl, ho daou int erru 'vel daou gi [C'hont !
Var roud ar c'had, 'gav d'eo, d'en em lakat e spi !
O ! kouplad chass diboel, ar c'hadik-se, m'hen tou,
N'eo ket prest da goueza c'hoaz dindan ho skilfou !
Me jom aman da guz evit guelet penaoz,
'Vit stigma ho rouejou, a raio an daou goz !
C'hui, tec'hit ac'halen ! Mez diouallit, m'ho ped,
Pa zantit goulou deiz o tont var ho spered,
Diouallit da vouga ar sklerijen santel,
'N eur rei dourn da laza eur paourkez bugel !

An tri drouiz a za kuit : Taliezin en em guz.

EIL PENNAD

GUENC'HLAN, KONOMOR

GUENC'HLAN

Ia, eur pemp pe c'huec'h drouiz, gant n'ouzon pe
O klevet Taliezin eo bet troet o fen, [froudren,
A ne fell ket dezho en hon lid kemer perz.
Hogen, hon lid santel ne hell kaout e nerz
Nemed unanet 've ioulou an Drouized oll
Gant da zourn, o vunta ganez pa ri an taol !
Mez, e fas an envou a fell d'in hen toui :
D'am ger, pen an Drouized vo red d'ezho stoui ;
Nep ne falvezo ket rei an dourn d'am zikour
A rank beza skoet 'vel ma skoer ar skour,
Gant aoun a ve breinet ar vezen en e fez.
Ia ! peb drouiz, dindan boan da goll e dam buez,
A unano bremaik e ioul gant hon hini ;
Hag arog skei Tremeur, laz d'in kement hini
En deffe c'hoant ober aman e veg figuz.
Pell 'zo na vezo bet an dolmen sakr ken ruz !

KONOMOR

Laza, laza bepred !... Va buez pen da ben,
Abaoue m'euz kavet ac'hanoud var va hent,
N'eo bet, kouls lavaret, nemed eur vuntrevez !
Evel a vez galved en eun ti ar c'higer
Evit prepar kig fresk eur vech bep an amzer,
Galvet ganid 'te, Drouiz, pet guech n'oun-me ket deut
D'an derven-man, a guz an dolmen en e skeud !
A bevech var grizien an derven a redaz
Eur poul goad da ruzia an dour skler 'bars ar waz !
Na pebeuz spout varnhoun, pa teuan da zonzal
En oll dud-se, 'zo bet lazet ganen guechall !
Diraz'hon e savont e kreiz va hunvreou,
Ar goad o tivera c'hoaz euz ho gouliou,

Spout mantruz ar maro gantho en ho zellou,
Hag en ho gouzougou kriaden an Ankou !...
C'huec'h pried 'm euz lazet gant ho c'hrouadurien,
Aze, var an dolmen, an eil goude eben !
Lazet 'vit da zoueou, var da urz, o Drouiz-Meur !
Ar c'huec'hvet anezho, Trifina, mam Tremeur,
Doussoc'h eged eun Eal, kaeroc'h eged andeiz, [Breiz,
Merc'h d'ar c'hont-meur Guevroc, euz gouen Rouaned
Euz hor skilfou oa bet diframmet gant Gildas.
Bremen, pa eo kouezet e mabik en da las,
N'eo ket aoualc'h d'id c'hoaz e teuffe va c'hleze,
Gant ar c'hrouadur paour da lemmel e vue !
Arog skei va mabik, eur pemp pe c'huec'h drouiz all
A dle koueza o fen dindan drem va bouc'hal !
Ganin, evit eur vech, re a c'houlennet Drouiz :
Kement a meuz lazet dija, ma z'oun eat skuiz !

GUENC'HLAN

Skuiz, skuiz o laza ?... Gra evel a gari !
Mez dalc'h sonj : hon doueou 'zo prest da gounnari !
N'eo ket hirio, setu meur a vlavez dija
A vije, o Kont-meur, dleet d'id e laza.
Ah ! skuiz out o laza ! An doueou, va mab,
'Zo skuiz ouz da velet dioutho ober goab,
A var da ben me 'vel eun dourn spoutuz savet !
Skei, pe beza skoet ! Laza, pe beza lazet :
Setu da blaneden !... 'Vit ar vech diveza
Eo, a c'houlenn ganez an doueou laza !
Pa vezo kinniget dezho Tremeur, kerkent
Dirazoud da beb gloar 'vo digor frank an hent !
Me a glev, e goueliou da vagik, an avel
Prest da c'houeza evit da zongen, du-hont, pell,
Da bors an eurusted, er broiou burzuduz,
'Lec'h ma sav var an aod ar paleziou skeduz,
'Lec'h ma ruilli e touez an arc'hant hag an aour !...
Mar deo guelloc'h ganez beva izel a paour,
Euz a berz hon doueou gouzanv spout hag anken,
Ho c'hudurun bepred o krozal var da ben ;

Mar deo guelloc'h ganez eun deiz, dindan ho zroad
Evel eur prenv, renta da vuez a da c'hoad :
Neuze, va faotr, kendalc'h da ren da vuez reiz,
Evel eul labousik kaner var bord e neiz !

KONOMOR, *spountet*

Ho ! setu adarre varnhoun kouezet ar spount !
Spessou ar re lazet en em ziskuez du-hont,
O tiredek varnhon oll gant her a gant drouk !
Trifina ! Trifina, ganthi var e gouzouk,
Var e gouzouk guennoc'h 'vit gouzouk eur goulmik,
Tri gouli ruz, tro dro dezho ken flour ar c'hik !

GUENC'HLAN

Kredi 'ri ac'hanon ? Ar re-ze 'zo kasset
Evit goulén Tremeur ! Pa vo dezho taolet,
Ne deuio mui biken spes ebed var da dro,
Klozet ma vint er bez gant siel ar maro !
Mez ma ne fell ket d'id senti d'ho goulennou,
An doueou a zalc'ho digor frank ar beziou,
Euz ar bez a veli anaoun o tilam
Da ziframma ganez da vuez tam a tam,
A da grigna ennoud, didruez, direpos,
Evel prenvéd diboel, da galon deiz a noz !

KONOMOR, *o koeza d'an daoulin*

O Drouiz, truez ouzin ! Plega a rankan d'id !
Hervez da c'hoant, fennoz a vezo great al lid !...
Ema va zoudardet skignet oll dre ar c'hoat,
Peb hent a peb ode gantho diouallet mad !
Dre zindan an douar 've red kemer an tec'h,
Ker brao am euz stignet rouejou dre bep lec'h !
A ne anavezan nemed eun den, Gildas,
Ag a c'helfe tenna ar gedon eus hon las !...
Ne garfen ket hirio, etrezomp a Tremeur,
Kaout, 'vel ar vech all, drem glaz ar Manac'h-meur.

GUENC'HLAN

Lest ganen-me Gildas ! A deomp dre ar c'hoajou
Da stigma c'hoaz strissoc'h-strissa ar rouejou.

TREDE PENNAD

TALIEZIN, *o tiskoach*

Spuffa a ra va bleo pa choman da zonjal
En traou spountuz aman bet c'hoarvezet guechal !
Bremán 'c'houezan perag, o tostat ac'halen,
A vije va c'halon goasket gant an anken !
Ken aliez aman 'tremenaz an ankou,
M'en deuz, var gement tra, merket doun e roudou !
Ken aliez aman 'tremenaz ar maro,
M'en deuz, e kement tra, lezet e vlaz c'houero !
Lezet a peuz aman, eneou en angoni,
Euz poan an tremenvan an tanva ganeomp-ni ;
A gant an tanva-ze eo a zantan ennhon,
Dindan an derven goz, o skrija va c'halon !...
O ! pebeuz liou spountuz, derven goz, d'az deliou
Ar goad var ho glazvez en deuz laket e liou ;
Rag gant goad ez eo bet maget d'id da c'hrizien ;
Gant avel ar maro eo a gren peb-délien...
Q silaou.

Huanad ar maro, elec'h kan an avel,
Euz da skouriou tenvál eo a glever sevel !
O ! guezen ar maro hag an devalijen,
Pell ouzid a glaskin buez a sklerijen !
Sklerijen, var va zall peur a zayo an deiz ?
Guirionez, peur 'deuio da sklerijen em c'hereiz ?
O ! pebeuz c'hoant poanius, pebeuz naoun diremed,
Pebeuz sec'het iskiz a dourmant va spered !
Evach santel, euz a belec'h dre an envou
A strinki-te da zistana va skianchou !...

Mez piou, gant ar c'hoat don, 'zo erru adarre ?
Daou baotrik harp an eil var skoazik egile, [c'hen,
Ag o diou vrec'h skoulmet gant ho dreist ho c'her-
Ker brao dindan ar c'hoat tenvál gant ho sae ven ?

Evel gant ar varzed, telen zo gant unan,
Hag e zeuz etrezho kaoz a c'hoarz, a mouskan.

Ag en em guz adarre.

PEVARE PENNAD

TALIEZIN, kuzet, TREMEUR, ARMEL

TREMEUR, o kana, var eun tñn nevez

*Evel skouriou bras eur vesen,
Var zouar Vreiz en em asten
Divrec'h ledan ar Groaz kristen.*

*E kreiz ar skouriou burzuduz,
Pemp goul ar Roue Jesus
A bar evel pemp heol skeduz.*

*E peb leac'h ma sko an heol-ze,
A sav eienennou bue,
Kouls er meaziou hag en ene !*

*Var ribl ar mor, euz da c'hortoz,
Me glev 'sevel, e kreiz an noz,
O heol santel ! galv va Bro goz.*

TREMEUR

Ne d'eo ket kuzet c'hoaz an heol drek ar mene ;
Be vech, pa e velan o sevel dre an env,
Ne hellan, o Armel, miret euz va spered
Da zonzal e Jesus, an heol a dle e sked
Var zouar hon tadou en em skignà dre-oll.
Joa eo ganen pignat da vare ar zao-heol,
Evel an Drouized koz, var eur menez huel
Evit guelelet an deiz 'sevel var Breiz-Izel !
Mez elec'h kaout joa oc'h e velet, neuze
N'ouzon' pe seurt anken a sko var va cne !

A dre ma kan peb tra en douar, en envou,
Em c'halon-me ne sav nemed mouez ar c'hanvou.
Varnhon hirio ar boan a sko krenvoch-krenva,
Ken ne c'hellan miret, o Armel, da lenva.

ARMEL

Lenva, pa ma peb tra o kan' hag o c'hoarzin !
Truez a teuz, kredabl, euz bleunioù ar mintin ;
Oc'h o guelelet o skuill evel daelou ho gliz,
Sevel a ra enn-oud, Tremeur, truez iskiz !

TREMEUR

Breurik, arabad eo va goapât evellen !
Nan, a dra zur, n'eo ket daelou gliz eur vleunen
Eo a lak an anken da voaska va spered !
Daelou gliz gant an heol a vez sec'het abred ;
Mez va daelou a zalc'h da vera hed an deiz,
A va foan, dibaouez a zalc'h digriz em c'hreiz !
Lavaret a rin d'id petra 'zo kiriek d'in
Da lenva, daoust da joa a da heol ar mintin.

Guelelet t'euze avechou, pa vez an deiz arru,
Var hent an heol o tont, a verniou, koummoul du
Henvel euz menezioù berniet var menezioù ?
Kaër en deuz pignat a distol e varrou,
An heol ne hell, na dreist, nag a dreuz ar goabren,
Lakât var ar mezioù da bara sklerijen !
Mad, ar zonz 'zo laket doun em c'haloun, aze,
Dirag heol va Jesus me eo ar goabren-ze !
A biken var hor bro e heol sakr na baro,
Nemet pa vin-me bet skubet gant ar maro !

ARMEL

Ar seurt sorc'hennou eo a ra d'id ker bras nec'h ?

TREMEUR

Petra ! hag hen a hell beza pouneroc'h bec'h,
Var spered eur c'hristen, eged ar zonz ez eo
Kiriek d'an heol santel, da heol an Doue beo,

Ma na teu da bara var ene e vreudeur ?
'Vidoun-me ar zonz-se 'zo, ennhon da bep heur,
O skei var va c'halon 'vel eur broud bilimuz...
Beza eur goabren zo dirag heol va Jesus,
Beza var hent an deiz pa strink, euz lein an env,
Ken kaer a ken nerzus evit klask eun ene,
Evit klask an ene da lakat da zevel
Enn'hi bleun an envou gant blaz a c'houez ar mel !...
Ma z'oun ar goabren-ze, ah ! kentoc'h, ra vezin
Dispennet dre an env gant an ezen mintin !
Ra vezin gant an heol teuzet var ar meaziou
Da veza gliz klouar var galon ar bleuniou !
Ra vezo va goad oll skuillet var douar Breiz,
'Vit ma skedo flammoc'h varn'hi heol sakr ar Feiz !

ARMEL, e kemer e zourn

Perag, o va breurik, kemeret ker bras nec'h,
Var zigarre eur zonzj deud d'id... euz a belec'h ?

TREMEUR

A belec'h, ma n'eo ket euz Doue e-unan ?
Bepred eo bet enn'hon ar zonz-se ez bihan !
Ar zonzj ne zoun ganet nemed evit mervel,
Mervel yaouank, tostik va bez euz va c'havel.

ARMEL

Sonzj edoun da zerc'hel kuzet d'id a viskoaz
Eur zekret m'euz desket, n'euz ket pell amzer c'hoaz !
Mez, hirio pa velan eo re denval da ben,
Red eo d'in, 'vit pellât diouzig an anken,
Diskleria d'id ar pezh am oa klevet neuze.

TREMEUR

T'euz klevet eur zekret a zivar va fen-me ?

ARMEL

Ia, Tremeur ! Diouzig n'emoun oc'h ober goab !...
A gouzout a rez-te euz a biou oud-te mab ?

TREMEUR

Tremeur 'zo er bed-man eur paourkez emzivad !
N'anavezer d'ezhan na kar, na mam, na tad !
Stlapet oun bet, ne c'hoar den 'bed euz a belec'h,
Da vervel, eun nozvez, dirag dor ar venec'h.

ARMEL

Tremeur, klev ac'hanoun, a paouez da ouela !
Tremeur, te 'zo ganet euz ar goad huella,
Euz ar c'haera gouen dud zo bet biskoaz er bed !
Breur, en da c'hoazied, goad Arzur eo a red !

TREMEUR

Klask a rez tro, Armel, da zec'ha va daelou,
A c'hoarzin a raffen va goalc'h euz da silaou,
Pa ne vez re bounner va foaniou dibaouez
'Vit da silaou hirio 'tibuna farserez !

ARMEL

Dirag an Env, Tremeur, dirag Doue, m'hen tou !
N'euz farserez ebet ganin en va c'homzou !

Eun deiz, e kreiz ar c'hoat, a beden en distro
Pa veliz tostik d'in, drek eur voden dero,
Daou zen o tont : unan oa Gildas, hon abbad.
An hini all, perlez hag aour euz e zillad,
A ioa eur c'hleze hir 'stribill euz e gostez ;
Guevrok, kont-meur Guened, a ioa hano hennez,
Dioc'h ma helliz gouzout o silaou piz ho c'haoz ;
« Petra teu da veza mab hor Rouaned koz ?

A c'houlenne Guevrok ; tostât a ra an heur
Ma savo var e drôn va mab-bihan Tremeur ;
Neuze 'vezo guelet a savet t'euz da Vreiz
Eur goaz krenv, guir galon eur roue en e greiz ;
Guelet a vo hag hen a teuz dalc'het dinam
Goad Arzur, a deuaz d'ar paotrik gant e vam ?... »

O kleout kement all, ken mantruz n'em gaviz,
Ma ne gleviz netra mui ken euz ho diviz.
Mez aoualc'h m'euz klevet, pa meuz gillet deski
Eun dra da zistana da c'houli o leski.

TREMEUR

Me euz a c'hoad Arzur ? Oh ! a possubl a ve ?...
 Anaout a ran breman pe seurt tan a verve,
 Ag a zeve enn'hon va c'halon a va goad...
 Nani, ne m'euz poan ebed breman, pa zonjan mad,
 O kredi a zisken, Arzur, euz da hini
 Ar goad birvidik-man a red em izili !
 Fors peur teu da hano beteg va diousskouarn,
 A seblant d'in kleout trouz dir a trouz houarn,
 Trouz houarn a trouz dir euz va gervel da vont
 Var an dachen vrezel 'kreiz ar goad hag ar spount !
 An daouarn-man n'eo bet desket d'ezho biskoaz,
 E iliz ar venac'h, 'med ober sin ar groaz,
 An daouarn-man a grog terzien brezel enn'ho,
 Arzur, bevech pa teu d'am skouarn da hano.

ARMEL

Ia, ar guel ac'hanod en heur-man zo aoualc'h
 Evit diskuez pegen birvidik a gendalc'h
 Goad hor Rouaned kozebars da c'hoazied ;
 N'eur zeski d'id kroacha devot da vizied,
 Gildas n'euz dinerzet tam ebet da zivrec'h ;
 A m'an deuz desket d'id pedi 'touez ar venec'h,
 Maget en deuz en'od an nerz a vo eun deiz,
 O mab-bihan Arzur, silvidigez hor Breiz.

TREMEUR

Nemed krenvoc'h a ze eo enn'hon goad Arzur,
 Pa m'euz bet gant Gildas goad Jesus d'am mezur.
 Goad Arzur a roffe d'in nerz da gaout an trec'h
 Var gement a zaffe, a ehed Breiz, e vrec'h :
 Goad Jesus a roffe an nerz kals krenvoc'h c'hoaz
 Da vervel evit Breiz, ma vez red, 'ben varc'hoaz !...
 Rag kendelc'her a ra bepred var va c'halon
 Ar zonz eo astennet dourn ar maro varn'hon ;
 N'eo ket en eur drec'hi enebourien va bro,
 Mez kentoc'h, neur c'houzanv evit-hi ar maro,

Eo a dlean beza da Zalver, Breiz-Izel !
 Me roio buez d'id, o va bro, neur vervel.

Hag a gán var dón ; *Non le tailleur...*, mez goustad a trist :

*Klevet a meuz euz va gervel
 Eun ene o vervel.*

Buhanoc'h. { *Ene Breiz edo o lenva
 Hag a leno' c'hoaz, krenvoc'h-krenva ;
 Klevet a meuz euz va gervel*

Goustad. { *Eun ene o vervel,
 Eun ene o vervel !*

*Mouez va mam eo, mouez va mam Breiz,
 Va c'haloun 'lam em c'hreiz !
 Ne varvi ket, o va mam Bro,
 Me meuz remed euz da varo !...*

*Mouez va mam eo, mouez va mam Breiz,
 Va c'haloun 'lam em c'hreiz,
 Va c'haloun 'lam em c'hreiz !*

*Euz da varo me meuz remed :
 Goad ruz va goazied,
 Beteg an diveza berad,
 Me roio evidod va goad ;
 Euz da varo me meuz remed :
 Goad ruz va goazied,
 Goad ruz va goazied !*

(Taliezin a en em ziskuez,
 o sillaou, o sellet).

*Ene va mam me ziframmo
 Euz liam ar maro,
 A va eneeurusoc'h c'hoaz
 A nijo var zu an oabl glaz.
 Ene va mam me ziframmo
 Euz liam ar maro,
 Euz liam ar maro !*

PEMPED PENNAD

TREMEUR, ARMEL, TALIEZIN !

TALIEZIN, *d'an daoulin dirak Tremeur*

Me eo, me eo, Tremeur, an ene paour-ze !
Beteg enoud eo bet douget, dre urz Doue,
Va c'hlemmou pa edoun bremaik, e kreiz an noz,
Pleget va chouk dindan n'ouzon pe seurt malloz !
Mez diveac'hiet oun oll o silaou trouz da vouez :
Euz ar malloz varn'hon ne zantan mui ar pouez ;
Hag a zeblant d'in kaout breman 'vel diouaskel,
Da alan o c'houeza enn'ho 'vel eun avel,
Eun avel d'am dibrad da nijal, drant a skanv,
Da nijal n'eur gana 'vel laboused an hanv !

TREMEUR

Mez piou oud-te, va breur ?

TALIEZIN

El lavaret a meuz,
Me eo an ene paour, ene hor bro, a teuz
E kreiz an noz tenvall klevet oc'h irvoudi !
Gant an Drouized edoun beteg-hen o pedi
Doueou an dero braz ; mez va c'halon pell-'zo,
A neubeudou, en em zistage anezho,
O c'hedal eur greden doussoc'h d'an eneou,
Hag eun Doue guelloc'h eged ho doueou !
Ia, Breiz oll, dre va mouez, eo a ioa o c'hervel
Eun Doue all evit e miret da vervel !
Gant an nebeud komzou a meuz klevet ganid
Kement a zo enn'hon gant nerz a joa a drid ;
Rag en da gomzou c'houek va spered a danva
Saour ar wirionez evit ar vech kenta !...
Mez tec'h, a tec'h buhan euz al leac'h euzus-man !
Euz da spia a zo tud bleizi dre aman ;

Soudarded 'zo kuzet a bep tu dre ar c'hoat,
Mal gantho var ar mean aze skuilla da c'hoad !
Deuz a heul ac'hanon dre eur riboul distro,
Me c'helfe da zifram euz a skilf ar maro !
Mez deuz buhan ; bremaik e vezo divezad !

TREMEUR

O va breur, bennoz d'id 'vit da avizou mad !...
Mez euz al leac'hiou-ma, perag ' klaskfen tec'hel,
Ma int bet merket d'in gant Doue da vervel?...
Pa vin taolet varnoud, na mouk a blod a vi,
O dolmen vraz digriz, bremaik d'am izili ;
Na skeduz 'vi bremaik da zaoulagad Jesus,
Pa ziruillo varnoud a boullou a goad ruz !...

TALIEZIN

Petra a c'hell renta ken dous d'id ar maro ?
Bev kentoc'h da veza silvidigez ar Vro !
Bev, pa 'z euz en da c'hoad nerz da zifen hor Breiz,
Pa strink euz da c'henou evel sked goulou deiz,
Pa bar da spered fur 'vel eun heol a lugern,
Ma tridan dirazoud, oll, spered hag eskern !
Siouaz, a red a vez a ve mouget kerkent
Ar goulou a groge da bara var va hent ?
Ho ! dre druez ouzin, hag euz meur a vil all
A red, hevel ouzin, dre an noz, 'vel tud dall,
Den yaouank, ne zez ket d'en em rei d'ar maro,
Arog ma vo dre oll, o para var ar Vro,
Ar sklerijen dinam a zantan euz da greiz,
'Vel euz eun heol divin, o sevel var Bro Vreiz !

TREMEUR

Ia, sklerijen divin var bro Vreiz a baro !...
N'eo ket euz va buez, breur, mez euz va maro
A strinko dre an env ar sklerijen divin !
Me eo ar gommoulen a veler da vintin
Dirag an heol evit e viret da bara :
Teuzet ar gommoulen, hag an deiz a sklera ;

Pa vo teuzet ive mogeden va buez,
Neuze eo a zavo var Breiz eun deiz nevez ;
Neuze va zad Gildas, gant e vouez entanet,
A c'houezo feiz Jesus e kreiz ar Vretoned ;
Neuze, o drouiz yaouank, var da ben a-veli,
Splam a dudiuz oll, heol Jesus o skedi !

TALIEZIN

Gildas ! Piou eo hennez ?

ARMEL

N'hen anavezvez ket ?

Gildas eo nerz Doue en hon touez, digasset
Da blega pen an oll dirag ar Groaz kristen ;
Sellou e zaoulagad 'zo 'vel diou luc'haden,
E vouez e deuz galloud ar c'hudurun, pa groz ;
Kestel brezel a freuz dindan pouez e valloz ;
E vantel, pa e zol d'an avel var ar mor,
A gerz evel eur vag gant e goueliou digor.
A dre ar bed krouet n'euz galloud den na tra,
Pa sav Gildas e vrec'h, kement na rank plega.

TALIEZIN

Hag e pelec'h e chom an den burzuduz-se ?

ARMEL

E ma dre ar c'hoajou en tu bennag aze !

TALIEZIN

O Jesus a c'halvan evit ar vech kenta :
Va renit, me o ped, dre an hent ar berra,
Evit ma c'hellin kaout, hag el leac'h-man digas
Da savetei Tremeur, da servicher Gildas !

Fin an eil Arvest

TREDE ARVEST

D'an trede arvest, Tremeur, Taliezin ag e vignouned a zo kouezet etre daouarn ar C'hont ag an Drouiz ; e maint dirag an dolmen ; e ma ar zakrifs o kommans, pa zigouez Gildas ; Konomor a dec'h gant ar spount ; Tremeur, entanet e galon gant mouez ar zant bras, a grog en eur c'hleze prest da stourm.

Mez o c'houzout eo mab da Gonemor, ar mezussa muntrer a zo bet biskoaz, ar zant iaouank a zo mal ganthan mer-vel evit kuzat euz an dishenor ! En em lezel a ra gant Konomor, a ziben anezhan var an dolmen gant eun taol kleze !

Kerkent, liammou Taliezin a gouez ; sklerijen ar Feiz, a ioa pelzo o klask ene an Drouiz iaouank, a bar breman var e spered : gant goad Tremeur, prenet ene Taliezin, a mouget ar relijion goz ; prenet ive ar bobl oll ; rag Taliezin, er pezh-choari-man, n'eo pen-da-ben nemet skouer ene Breiz o tilezel an doueou faoz evit ar guir Doue !

KENTA PENNAD

GUENCHLAN, hag e Zrouized ; TALIEZIN, hag e re, liammet ho zreid hag ho divrec'h ; TREMEUR, er memez doare ; KONOMOR, SOUDARDED.

GUENCHLAN

Hor spered re vuhan en d'oa kemeret nec'h ;
Doueou hon tadou koz eur vech c'hoaz a zo trec'h !
Gant Drouized an dero a choumo ar gounid ;
Hervez al lezen red, great a vezo al lid,
A die da virviken, var eneou ar bed oll,
Diazeza galloud doue santel an heol !...
E harz an dolmen sakr, setu aman Tremeur
A gant'han ar pemp drouiz traitourien d'ho breudeur.

Ar re-man ho deuz c'hoaz etre daou da zibab :
Rei dourn da Gonomor da skuilla goad e vab,
Pe var an dolmen sakr, ho-unan eb truez,
Renta d'an doueou ho goad hag ho buez !

TALIEZIN

N'eo ket drem ar bourreo, na drem kriz an ankou,
A raffe d'in kemer perz en da dorfejou ;
Setu va c'halon noaz : Bourreo, sko pa gari !

GUENC'HLAN

Ansav, evelato, n'eo ket eur seurt c'hoari
A oaz-te o c'hedal, paourkezik didalvez,
Pa kredot sevel dec'h ken divergont da vouez ;
Esper e toa da gaout, o tec'hel diouzin,
Elec'h noz ar c'huz-heol, ar sklerijen vintin !
E noz du ar maro bremaik 'vi sebeliet ;
Euz komzou an Drouiz koz en doa da genteliet,
Neuze 'teuio sonj d'id, a na pebeuz kerse,
O den yaouank diboel, 'savo enoud neuze !

TALIEZIN

Sko ! sko ! 'lavar an d'id ; mal 'zo gant Taliezin
Mont da glask er bed all ar sklerijen vintin ;
Bet a meuz bet hirio an disvel anhezi ;
Mal eo d'am daoulagad en em beurzigerri !

GUENC'HLAN

Oll en ho fallentez a fell deoc'h kenderc'hel ?

AN DROUZED YAOUANK

Oll, gant Taliezin, ni a c'houlenn mervel !

GUENC'HLAN

Drouized chomet fidel, trouc'hit euz an derven
Bep a c'hurunen c'hlaiz da lakat var o fen !
Konomor, chom aman gant da gleze dispak,
D'ho skei, pa vezint prest, e hars an dolmen sakr !...

Epad an amzer-se me gano, d'ho kedal,
Eur c'han reizet hervez lezen barzed guechall,
Eur c'han da eneou hon tadou, d'ho gervel
Da ziniyal aman euz ar bevar avel ;
Eur c'han d'hon doueou d'ho lakat da zisken
Var douar Breiz-Izel, da skoulma da viken,
Etrezho hag etre spered ar Vretoned,
Al liammou nevez gant ar goad siellet.

Ag e pign var an dolmen

Var eun tòn nevez :

*Diredit oll, c'hui brezellourien koz
A c'hourin c'hoaz, var lein goabren an noz,
Goad en dro deoc'h o redek a boullou,
Ken eo ruz-beo tachen c'hlaiz an envou !*

*C'hui, Drouized bras, a red goustad a sioul,
Rez ar prajou, var karrik ar c'hoummoul,
Gant an avel o trei ken skanv e rod,
Ma ne veler e roud var gliz ar iead ?*

*C'hui, doueou a zo e peb tra oll,
En euz o rei nerz a gor d'an heol,
E dourn an Drouiz da rei mouez d'e delen,
Hag en douar, da rei mel d'an derven.*

*Deuit ! ma skignfot dre bevar c'horn ar vro,
Var an heol sakr, an dud hag an dero,
Ar c'hlizien c'hoad, ouzimp, 'vit ma tec'ho,
Bugale Breiz, sperejou ar maro !*

Gildas a zigouez, eb beza gullet !

GUENC'HLAN a gendalc'h.

Eneou euz a bep oad, eneou euz a bep stum
Euz ar bevar avel, en-dro deomp n'em zastum ;
E maint oll en-dro deomp oc'h irvoudi, var gren,
O c'hedal an darvoud a dle ama tremen.
Hag huelloc'h, en oabl, an doueou ho-unan,
Euz goueled an envou, 'deu da silaou va c'hân.

GILDAS, oc'h ober sin ar groaz var an env

Dre urz an Tad, ar Mab, hag ar Spered-Santel,
Sperejou diredet var ar bevar avel :
Gant sin kroaz va Jesus, me ho skub ac'halen,
'Vel 'vez gant an avel skubet ar goumoulen !

*Konomor a vel neuze Gildas ; leusker a ra eur griaden ;
Guenc'hlan a dro e ben, hag a vel ive ar manac'h ; disken
a ra divar an dolmen.*

GUENC'HLAN

Piou eo ar pen moal-man, den dizakr a divez,
'Touez an Drouized santel a gred en em ziskuez ?
Spountet gant trouz e vouez sperejou hon tadou,
A zinije 'vit hor silaou, a vagadou.

GILDAS

Pen moal ! Te eo hirroc'h da vleo a da varo :
Mez hirroc'h da c'halloud n'eo ket evelato !
Gant da vleo hir, bremaik, a gant da varo kaer,
Te ielo da velet pelec'h, gant ken bras her,
Eo tec'het dirazhoun da zoueou spoutik :
En ifern, 'vit ho c'hlas, me da gasso bremaik.

GUENC'HLAN

Kentoc'h, var an dolmen pel a ioa dizec'het,
Da c'hoad a ziredo, 'vit goalc'hi da bec'hed !...
Konomor, krog enn'han, a gra dezhan renta,
Arog skei ar re-man, e vuez ar c'henta !

GILDAS

Konomor n'euz desket a bell 'zo petra dall
Da houarn na da zir steki ouz pennou moal !...
Dalc'h sonj euz da gastel diskaret en e boul,
Skoet gant nerz va mouez krenvoc'h 'vit an tan foultr !
An hano 'zo aoualc'h 'vit lakat da dec'hel
Sperejou an ear dre ar bevar avel,
A c'helfe, en douar, dindan ho treid, kerkent
Var-ehun d'an ifern digerri frank an hent ;

Hag eno, a dra zur, d'ar c'hont-meur Konomor
Etouez ar pennou braz 'vo roet eur gador !...

Skrija raffe er c'hoat an oll loened gouez ;
Gant va mouez, n'eur iudal, a unanfert ho mouez,
Ma vezfe displeget dezho da dorfejou !
Ma vez stlapet outhan stlabez da bec'hejou,
Aoualc'h 'vez anezho 'vit saotra an oabl glaz,
Ha moug a sklerijen an deiz evit biskoaz !

En hano an Doue, mestr ar bed, e komzan,
'Ma Doue o sevel, ganthan goalinier tan ;
Me a glev dre an Env o tont, en eur c'hourdrouz,
Mouez ar c'hudurunou dindan ar c'hoabren rouz ;
Me a vel, pleg displeg, euz ar goumoulen zu,
Luc'haden e gounar d'az renta e ludu.
Varnoud, ne zantez ket an arne o poueza,
Ken pounner, ma z'eo skler eo prestik da goueza ?
Gant da fallagriez, bemdez a bounera,
Bemdez a gresk fulor an tan prest d'as flastra !

KONOMOR

Drouiz Guenc'hlan, d'am sikour galv 'ta da zoueou !
Krena 'ra va zam korf evel eur bern deliou !
Derven vraz a santel, gant da skouriou ledan
Difen an denik paour a zo aman dindan !
E zellou a zev d'in va daoulagad ! Pelec'h,
Dirag spout ar vouez-se, 'kemerin-me an tec'h ?

*Lezet en deuz e gleze da goueza ; Gildas a grog enn'han,
a drouc'h liammou. Tremeur, a ro d'ezhan ar c'hleze, hag
a ra d'ezhan pignat var an dolmen huel !*

GUENC'HLAN, da Gonomor

Den muioc'h digalon, eged eur plac'h netra :
Setu kollet ganez ar sikour ar c'hrenva,
A c'helle da zifen eus taol da enebour !
Euz a berz an doueou perag goulenn sikour,
Pa oa 'tre da zaouarn, 'vit diskar ar pen moal,
Ar c'hlezen'eo bet c'hoaz trec'het gant unan all,
Ar c'hleze a zalc'has dourn Arzur e-hunan ?

GILDAS

E ma breman etre daouarn e vab-bihan,
Tremeur, en da zaouarn kleze ar Rouaned,
Ho c'hleze en da zourn, hag en da c'hoazied
Ho goad ive, va mab, goad Rouaned guechall,
Kleze a goad ne 'z euz na kleze na goad all,
A c'hellfe ho zrec'hi dindan bolz an envou !
Gant kleze braz Arzur, trouc'het da liammou !
Stlap pell 'ouzid breman mantel paour ar venec'h !

Ag a den e vantel gant Tremeur.

O Roue, sav da ben ; brezellour, sav da vrec'h !
Diskuez ar stern brezel, great gant dir a gant aour,
A visker d'id bemdez dindan da zillad paour !
Deut breman c'hui, Kont-Meur, a c'hui, tud didruez,
Gant mab ho Rouaned ua lemmel e vuez !
Te 'gave d'id, kiger, kaout da gountella
Eun oanik ne c'houffe nemed klem a krena :
A setu dirazoud, ganthan savet e bao,
Eul leoun, skilfou dir dispak ganthan ker brao !

*Tremeur, var urz Gildas, en deuz taolet e vantel ; e ma
var an dolmen, gant e stern vrezel skeduz, o heja kleze
Arzur.*

TREMEUR

O kleze, pe seurt tan oa kuzet en da droad ?
Kerkent m'hen deuz va dourn kroget enoud, va goad
A dreuz va goazied 'zo kroget da virvi !
Sonjou du ar maro, 'vel eur vanden vrini,
Pell, pell euz va spered ho deuz tec'het kerkent !
Em c'halon nevezet ne chom mui diagent
Nemed c'hoant da veva, c'hoant da vont dre ar bed,
Em dourn kleze Arzur, o taol tan a luc'hed !

ARMEL

Dalc'h ta, va breur ! Dilam euz an dolmen garo,
Distag da vuzel flour euz evach ar maro !
Lez da gregi enoud sec'hed iac'h ar vuez !
Ezen fresk an esper var da galoun a c'houez :

List' hi da zispak d'id da askel n'eur dridal,
List' hi d'az dibrada dre an oabl da nijal !...
Gant da stern a vrezel na peguen kaer oud 'te,
Da zrem flam o para euz sked dir da glenze !

TREMEUR

Ia ! douar va c'havel, n'eo ket dre va maro
Eo a fell d'in breman da zervicha, va Bro !
Doue en deuz laket goad em goazied d'in,
Doue en deuz c'houezet tan d'in 'leiz va feultrin !
N'eo ket eun oan aounik en deuz great ac'hanoun ;
D'in a roaz skilfou a kaloun eul leoun !
Ar bed oll o krena dirag va c'hleze noaz,
O Jesus, a zoublo bremaik dirag da groaz !
M'ar d'eo kurunennou, Konomor, a fell d'id,
Deuz da heul va c'hleze dre ar bed d'ho gounid !
Deuz ganeomp, a tro kein da veleik an dero,
En-em daol ganeomp-ni e kreiz an avel dro,
Evit beza sammet ganthan, dre an envou,
Dreist troniou an douar hag ho c'hurunennou !

GUENC'HLAN

Va den, aben ober d'ar C'hont eur seurt peden,
A te a c'hoar piou eo ar C'hont, a pe seurt den ?

TREMEUR

Penaoz a c'helfen-me anaout ar C'hont-meur ?
Etouez ar pennou bras ne meuz bevet nemeur.
Gouzout a ran ebken eo eur brezellekaer ;
Hervez ar pezh a meuz lennet em levriou kaer,
Eur seurt den 'dle enn'han beza kaloun huel,
Var varc'h kerkent ma son trompilhou ar brezel,
Euruz pa sav er vro eur Roue kalounek
D'en em deuler d'e heul dre ar bed da redek,
Evit difen a zroug guiriou an dud netra,
Diskar an dud huel a ioa euz ho flastra ;
A dreist-oll 'vit lakat, var oll boblou ar bed,
Da ren ar C'hrist-Doue, Roue ar Rouaned !

GUENC'HLAN

Mes ma vez ar C'hont-Meur unan euz an dud-ze,
Ne garont ken c'hoari nemed c'hoari kleze,
Da doulla da heman e galon, goudeze
Da drouc'ha da hennet e ben var e ziskoaz ?
Ma ne vez bet ar C'hont 'med eun den a viskoaz
Touellet da laza, da zistanka ar goad,
Ken a lez e peb hent, 'lec'h ma taolaz e droad,
Roudou goadiellet er vouillen hag er pri :
A te a lakfe c'hoaz da zourn en e hini ?

TREMEUR

Ia, va dourn a raffin, arog e gas d'ar groug,
Da skoulma ar gorden dezhan euz e c'houzoug !
Eur Roue, daoust ma dle d'an oll dud beza tad,
A dle skei ar re fall 'vit difenn ar re vad !

GUENC'HLAN

Ac'hanta, Konomor, a dihuna a ri ?...
O velet er paotr-man kement a goantiri,
Enoud, 'gav d'in, oa krog an deneridigez,
Ag a deunze dija enoud da galon gouez,
Gant komzou ar paotrik, enn'ho mesket ken brao,
Evit da douella, mel flour a tan bero.
Bremen 'velez eo red pelaza pe mervel ;
Mez ged c'hoaz, eur pennad, ma vo d'id roet ar guel
Euz ar pezh 'zo kuzet evidoud e kalon
An nep a ginnige da gemer da vignon !...

Tremeur, petra 'ri-te, pa vi roue eun deiz,
Ma teuffez da gaout, etouez sujidi Breiz,
Unan hag en deffe bet ar fallagriez,
Hen 'savet a netra, da vont d'en em ziskuez
Dre baleziou ar vro, 'touez an dud chentiled,
Da douella enn'ho c'huec'h a zimezelled,
Da eureuja gantho an eil goude eben,
'Vit ho laza gant ho bugel, var eun dolmen ?...

TREMEUR

O Drouiz, te a gont d'in sorc'hennou bugale
Evit lakat aman ac'hanon da zale ;
Biskoaz ne vo kavet, etouez oll grouen an dud,
Eun den trec'h e grizder d'an anevaled mud !

GUENC'HLAN

Ha ! kals traou, gant Gildas, a zo bet d'id desket,
Mez her guele a ran, ar manac'h n'hen deuz ket
Diskleriet d'id traou all, mad ive da c'houzout !

GILDAS

Tav, den kriz ! Ne ro ket d'ar paotr da anaout
Traou hag a ve goude, var ar spered, evel
Bilim tan da zevi e eskern hag e vel !

GUENC'HLAN

Manac'h, te gave d'id, dre da c'hourdrouzou gouez,
Hon trec'hi, ni hon daou, gant ar spout hag ar vez.
A te a gave d'id, paourkezik krouadur,
Hon diskar n'eur c'hoari gant kleze koz Arzur !
Ne meuz nemed eur gomz da lavaret, d'am zro,
'Vit ho trec'hi ho taou, a rei d'id ar maro ;
Eur gomz evit krenna da skilf, a da askel,
A ioñdispak ganez 'vit nijal ken huel,
Goude beza skoet ac'hanomp da vervel !
Gant eur gomz a c'houezin eun tan e kreiz da vel,
Eun tan a ne helfe ar mor oll da vouga
P'hen do, e kreiz da c'hoad, gellet en em zila !
Sed' aman ann'ezhi : an den ken dinatur,
N'hen deuz anavezet biskoaz ken plijadur
Nemed o tispenn kik an dud gant e gleze,
An den-ze eo hennet 'zo dirazoud aze !
Ag an den-ze en deuz skoet, var an dolmen,
C'houec'h pried da vervel an eil goude eben :
An den-ze eo da dad, o mab-bihan Arzur !...
Ah ! koueza ra da ben, a zavez ken assur,
Gant an taol-man a meuz dac'het d'id 'kreiz da dal !
Digor breman eta da askel, n'eur strakal.

Dispak breman da skilf, o leoun gallouduz !...
Setu sklaset da c'hoad, den yaouank froudennuz ;
Mouget eo da ourgouil, o mab-bihan Arzur,
Gant ar vez da veza mab d'eun den ken hudur !

TREMEUR

O Gildas, o Gildas, asten d'in 'ta da zourn !...
Ia, sklaset eo va goad, brevet eo va askourn !
Gant an teod-man, soubet e bilim an ifern,
Eo silet ar maro d'in e kreiz va eskern !
Ah ! lavar d'in eur gomz, lavar n'eo nemed gaou,
Ar pezh e moun bremaik oc'h ehan da zilaou !

GUENC'HLAN

Ah ! devi 'ra an drein a meuz sanket enoud !
Evit da zizreina, Gildas 'zo dic'halloud ;
Va c'homzou zo guirion, den n'ho dislavaro,
Goaz a ze ma int d'id eur bilim a varo !
Euz an evach trenk-man, pa eo stag da vuzel,
Beteg al li 'vo red d'id rinsa da skudel !
Ia, te ag a zave ken bras lorc'h en da greiz,
O sonjal oud ganet euz a gaera goad Breiz :
Te zo mab d'ar vila, a d'an izela den
A zo bet o veva var an douar biken !
Konomor 'zo hirio azezet var eun trôn,
Den ne c'hoar euz a biou en deuz sunet ar vron ;
Eun deiz m'euz he gavet e kreiz eur c'hoat tenval,
O redek, noaz a gouez evel eun aneval ;
Me a meuz e zavet, furmet korf hag-ene,
Evit beza em dourn, a-enep da Zoue,
Eur benvek prest bepred da skei a da laza ;
Dreizoun-me eo pignet d'ar renk an huella,
Dreizoun-me n'euz gellet, e ti ar Rouaned,
En despèt da Gildas, goulén a kaout pried,
Evit kaout da ginnik da zoueou an dolmen,
Evit hon lidou sakr, goad bugale kristen !
Da vam-te da-hunan, merc'h da Gont-meur Guened,
Rouanez dre e goad kouls a dre e gened :

Ia, da vam, eun nozvez, aman, euz dourn da dad,
Var ar mean m'oud varn-han, e deuz skuillet e goad !
Te da-hunan, erfin, arog zoken genel,
Eo bet red da zifram a zindan e gountel !

TREMEUR

Allaz !... N'euz mui ezom euz dir na kountili
'Vit treuzi va c'haloun, dispen va izili !
Abaoue mil bloaz 'zo ma 'z euz var da zolmen
Tud o skuilla ho goad, bez sur, Drouiz, n'euz bet den
Ag a ve 'vel d'in-me, bet ganeoc'h bourrevet,
En e galon kement a liammou brevet !
An ourgouil marteze o c'houeza d'in em c'hreiz,
'Vel eul labous iaouank pa gimiaid ouz e neiz,
E savén dre an env, 'vel mesvet gant ar joa
D'en em zantout bepred huélloc'h-huella !
Va spered a nije ken her a ken diroll,
Ma tizis pell du-hont 'lec'h ma sked, 'vel an heol,
Gloar divarvel Arzur dreist an oil rummou tud !
Eur pennad var va zal a baras sked e vrud ;
Gant eur bar aour kouezet e goueled va c'halon,
Goad va zad-koz Arzur en deuz tridet enn'hon.
En heur-ze ne oa den a zindan bolz an env
Ken birvidik e c'hoad, ken laouén e ene !

Da vouez, o skei varn'hon, 'vel gurun, stank a stank,
Euz bolz glan an envou am diskar 'kreiz ar fank !
Hag e zantan, ken rust ma 'z eo bet d'in va lam,
Euz ar vuez enn'houn eo torret peb liam !

Kenavo a rankan lavaret d'ar vuez !
Dec'h, eb klem hag eb poan, a mije euz ar bez
Guelet brec'h an ankou n'em asten d'am c'hemer,
Da falc'ha d'am buéz e flantennik tener !
Dec'h 'vel eur vleunennik, eb ban heol na ban gliz,
D'an douar da vervel 'stoué va fennik skuiz.

Hirio, pa teue d'in euz an env mil c'hlizien,
Pa lugerne ken flour barrou an heol laouén,
Pa bigne em c'halon, euz eienennou mae,
Dour nerzuz ar vuez, oh ! na kriz eo d'in-me,

Va Doue, n'em lezel gant falc'h dal an ankou !...
Neuz forz, klemmaden 'bed ne zeui euz va genou;
Krissoch eged houman eo bet oc'h angouni,
A pouneroc'h eo bet ho kroaz 'vit va hini !

TALIEZIN

Piou en deuz da rentet ken goan, ken kisidik,
O brezellour yaouank a velen bremaik
Nerzussoc'h a terroc'h 'vit Doue an engann,
Da lagad, da gleze, ho daou o teuler tan ?
Pen-kil-a-troad, da gorf ouzit 'zo dic'houli,
Soun da ben var da skoaz, a iac'h da izili !

TREMEUR

Gouliou 'zo, dioutho kals diessoc'h herzel
Eged ar gouliou a zispen eun ezèl,
Nag ar re a dreuzfe zoken kalon an den !
Ar gouliou-ze a jom diremed da viken !
Gantho oun bet tizet ; goullet va enor,
Pa 'z eo re vir, siouaz ! oun mab da Gonomor !

KONOMOR

Mez eo d'id kleout piou a teuz-te bet da dad ?
Mez eo d'id va gulet dindan da zaoulagad,
Mal eo d'id er maro mont da guzat da vez ?
Gortoz ma da stlapin eta raktal er bez !

GILDAS da Gonomor

Var da giz ! pe kerkent, e noz du ar maro,
Arok da vabik paour eur ger da ziskaro !

TREMEUR

Ia, ged c'hoaz ; rag ne gouezo eur vleven euz va fen,
Epad ma vo em dourn an dir-man d'am difen !
Var ar mean va-hunan bremaik en em ledin :
Mez arog, eur pennad 'fell d'in, var va daoulin,
Va Doue a va mestr, n'em deuler dirazoc'h,

Ag a zaoulin.

Em c'halon 'bars mervel, ma tiskennho ho peoc'h !



Re a drubuil a zo breman var va spered,
Evit sonjal enn'houn va-unan 'giz m'eo red,
Pa ma ouz va gervel mouez eled ar maro !
Sonjou euz a bep seurt a zo re var va zro !
O c'has kuit a fell d'in 'vit ma ne chomo mui
Nemed eur zonz enn'hon : Jesus, oc'h hini-c'hui !
Tec'hit ouzin eta, oll sonjou ar vuez !
An eil goude eben, tec'hit, peb c'hoantegez !

TALIEZIN

Oh ! na digar oud'te evidoun-me, Tremeur !
Perag rei d'in bremaik an hano dous a vreur
Mar d'eo kerkent, siouaz ! evit va dilezel,
A dilezel ganen hor mam Bro Breiz-Izel ?

TREMEUR

An den ne c'hoar morse pe mervel pe beva
Dezhan a d'ar re-all eo an talvoudussa !
Bremaik me a vele, evel dre eun huvre,
Dreist ar meneziou Du a meneziou Arre,
Dispak d'am daoulagad oll douar Breiz, va Bro !
Pen-da-ben dre enn'hi oa digor eun Ero,
Eun Ero doun, ledan hag hir, ken a dize,
A dreuz ar meneziou, euz eur mor d'egile !
Hag a seblante d'in e oa an Ero-ze
Roet d'in da frankat c'hoaz, gant bek va c'hleze !
Gulet a ran breman n'eo ket eur c'houezen zour,
Nag ivez eur vuéz a stourm hag a labour,
Eo a meuz-me da rei da zouarou va Bro :
Va goad eo a rankan skuilla 'kreiz an Ero,
Va goad 'vit ma savo, euz peb gliziennik ruz,
Vit poblou Breiz-Izel, pennou-ed puill a druz !

Doue, gant va maro a gant va angoni,
C'hui 'raio eul labour kaeroc'h 'vit an hini
A raffenn-me 'vit Breiz gant nerz va yaouankiz !
Dindan bec'h ar pec'hed, ar bed dinerz a skuiz,
A bareaz guechall gant goad a kroaz Jesus,
A nan dre vurzudou eur c'hleze gallouduz !

M'ho ped eta, Gildas, va lezit da vervel !
 Gant ho mouez burzuduz, na 'z it ket da c'hervel
 Nerz Doue d'am zifram euz a skilf ar maro ;
 Ar vuez a ve d'in re griz a re c'huerdo :
 E sioulder ar maro, va lezit da zisken,
 Var galon va Doue, da iac'hat va anken !

GILDAS

Ia, va mab, re skler eo, ioul Doue e-hunan
 Eo a verk an heur-man evit da dremenvan ;
 Disken e peoc'h er bez, va mab a va Roue !
 Pe gentoc'h, dispak frank askili da ene,
 O merzer Breiz-Izel, evit nijal d'an env ;
 Evit nijal d'an env, dispak da askili,
 Da askili ruz-tan a guen 'vel al lili,
 Guen dre ma varvez guerc'n, ruz dre ma 'z oud merzer !

Mez dioual da gredi, Drouiz fallakr a muntre,
 E tigorro e c'hoad an hent, 'vit an distro,
 Var zouar Breiz-Izel d'az doueu maro !
 Peuriferriet a vo breman da zoueu faoz !
 Euz goad Tremeur a zao an diveza malloz,
 A die poueza varn'ho evit ho chadenna
 Da viken e goueled an ifern an dounna !

Ia, guir eo, goad Tremeur, hervez da brophetiou,
 A vo silvidigez a buez d'an eneou ;
 Diframmet 'vint breman a zindan an dero,
 'Leac'h ma krene ar c'houden gant terzien ar maro,
 Hag e pignint var gern an dorgennoù huel,
 Da reseo sklerijen Jesus, an Heol santel !

TREMEUR

Galvit, 'tre ho tivrec'h e joa ar Baradoz,
 Ganeoc'h, o va Doue, va ene da repos !...

Me a seblant d'in kleout evel mouez eneou
 O skuilla en dro d'in oll c'houez vad an envou !
 Va recevit ganeoc'h, o eneou divlam !
 Ne moc'h-c'hui ket gantho, ene santel va mam ?

Deuit evit sikour o mabik da zevel,
 Va askelik harpet ganen ouz oc'h askel !...

Breman, kleze Arzur, euz va daouarn a gouez...
 Gourvez a ran laouen a hed an dolmen gouez !

Gourbez a ra.

Na kriz eo goulskoude sonjal a die va goad
 Redeg aman bremaik dre da zourn, o va zad !
 Diegi m'euz breman da lezel da goueza
 Va c'hleze koz etre da zaouarn d'am laza !
 O euzussa torfed, o spountussa maro !

A sav adarre.

Ne moa evet nemed beteg al li c'huerdo,
 A setu em c'halir breman ar peb trenka !...
 Ma helfe va maro beza da vihana
 Euz da oll dorfejou, siouaz, eur binijen
 Aoualc'h evit pellat dourn Doue euz da ben !
 Ah ! ma helfe va goad, va zad paour, da oalc'hi !...

GUENC'HLAN

Konomor, lavar d'in, a pelloc'h e chomi
 Da silaou, 'vel eur peul, komzou goullou da vab,
 Keit all zo var ar mean, ouzomp oc'h ober goab ?
 Kerz d'hen diskar kerkent, a dioual da grenat
 Kerz, a kass d'ar bed all e mab da Driphina !

Aman a gouez ar c'hleze euz dourn Tremeur.

KONOMOR, emeaz anezhan e-unan

Triphina ! Triphina, bourreo va zam buez !
 Setu diraz'houn c'hoaz da ene didruez !...
 Guenc'hlan, ne veleze ket aze, var an dolmen,
 Triphina gourvezet, e mab en e c'hichen ?
 Ar memez goad bepred euz e gouli a red.
 Goad milliget, bera a ri eta bepred ?
 Enoud ielo bremaik bek va c'hleze ken doun,

Astenn a ra ar c'hleze.

Ma evo ar restad euz goad ruz da galoun :
 ... Dall, viltans milliget !... A dal, te, prezeger !

Skei a ra daou pe dri daol.

Var barlen flour da vam te a gousko em ber !...

... Setu da ben d'an traon a zivar da ziskoaz,
A da c'henou serret d'am gourdrouz da viskoaz !...

TALIEZIN

O burzud !... Konezet eo liammou hon daouarn,
Evel pa vent trouc'het gant eul laonen houarn !
Ar memez taol kleze en deuz da zibennet,
Bugel santel, en deuz-ni hon dichadennet !...
... O korf maro, pe seurt galloud a zav ouzid ?
Elec'h lenva d'am mignoun paour, enn'hon a drid
Gant joa, en desped d'in, va c'halon em feultrin !
Pe seurt nerz a ra d'in koeza var va daoulin ?

En em daol d'an daoulin.

C'hoant ganin, 'vel eur c'hi, staga va muzellou
Da eva ar vuez a red euz da c'houliou !
Peb gouli 'zo enoud eun eienen buez,
O teuler gant ar goad, dour ar zilvidigez !...
Ene Breiz o c'hedal pell 'zo ar sklerijen,
Sell-hi o sinkla d'id, 'vel euz eun eienen,
Euz ar gouliou ruz-man, ruz 'vel faoutou an env,
Pa deu er volz mintin da bara goulou de !...

Breman a velan skler petra eo an Heol-ze
A ioa, eb e anaout, o c'hervel va ene.
Doue kristen, te eo, te eo an Heol skeduz
A velen keit all 'zo em huvreou burzuduz !
Te eo a meuz pedet gant va zelen bremaik,
A d'id eo a fell d'in kana c'hoaz va c'hantik :

*Dre oll a drid ar meaziou.
Me glev' an alc'houeder o kana,
Var nij', dreist ar menezioù,
Da c'hervel goulou deiz da bara ;
Tridal a ra va goad a va spered,
Kan dudiuz a vout em c'halon ;
Heol burzuduz, strink da sked
Ma paro dudi an deiz varn'hon !*

Ene Tremeur, d'an Env, o paouez da zevel,
Eo an alc'houeder-ze a dlle da c'hervel !

Pa 'z eo savet, setu te o strinka dre-oll
Dre Vreiz da sklerijen, o dudiussa Heol !

*Du-hont, var gern ar menez,
Setu c'hui o skedi, Heol laouen,
Heol glan, deiz al levenez !
Disken e strad tenvat an draonien !
Pobl o lenva e kreiz noz ar maro,
Tavit, setu an Heol o sevel ;
A dreuz da goajou dero,
An Heol a bar varn'oud, Breiz-Izel !*

Ia, Breiz oll 'zo breman, hag a vo da viken,
O veva, o tridal dindan da sklerijen !
Breiz eo ar c'horn douar a zalc'ho da bara
Varn'hi, o Heol divin, da sked dudiussa !
Neb lec'h ne vo guelek kement a eneou
Dreizoud o vleunia stank varn'ho bleun an envou !
Neb lec'h ne vo guelek irvi toulllet ken doun
A trempet, ma vez red, gant goad pur' hor c'halon,
'Vit ma savo varn'ho, gant nerz da c'hor, o Heol,
Ed puill da rei bara da eneou ar bed oll !

FINVEZ